

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

40. (LAZER E WREK) °

° Keñver. Penwern, Niv.
53 : Fio Chaffre
(laher he greg)

- Lazit ho pried, me rai va hini
Maz aimp hon daou d'an Ormandi
na da zerc'hel hostaleuri
brava daou zenik e vemp ni.

Pa deu 'nn ozac'h euz 'nn ofern-bred
edo ar c'hrek war ann oaled
o lurenn he mab bihan.
rei a ra seiz taol kountel gamm,
hag he stlepel war leur ann ti.
- enn han' Doue, aiou! emezhi,
Kerc'hit ar c'hure d'am noui.
- Aotrou Kure, na (me) ho ped,
deuet gan-en da noui va grek.
- Na petra c'hoarvez gant da c'hrek?
edo dissul e-tro'r vered,
brava grek a heljet gwelet
- He zreid a zo harpet er skabel
hag eo kouezet war eur gontel.
- Petra zo 'nevez c'hoarvezet
m'ema er goad du poulladet ?
- va zroad zo harpet er skabel
hag ounn kouezet war eur gountel.

Eur c'hrouadur a ioa enn ti
enn oad a zaou viz pe a dri :
- Aotrou Kure na gredit ket !
va zad eo en deuz he lazet.
- Te a zo din eur paotrik mad
a ra abred krouga da dad.
te her lakai da luskella
ouz^oar gorden huela
Lazet da vam, krouget da dad
Doue ra bardouno ann Anaoun
emaint brema war ar vaskaon

°a-is : /oc'h/

(Traon ar bajenn 36 eil bann, ur poz teir gwerzenn
enn e bart e-unan :)
Ann neb he goar hag he c'hano
Kant deiz pardoun a c'hounezo
hag hanter kant neb he zelaouo.
